

DIVERRADENN AN DEZENN
KOMZ, LIAMM HA NORM

Jean-Claude LE RUYET

Dindan renerezh Francis Favereau

Soutenet er Skol-Veur European a Vreizh-Roazon 2 d'an 18 a viz Kerzu 2009


Diwar-benn kelenn ar brezhoneg ema bet savet an dezenn-mañ dreist-oll. He soursi pennañ a oa studial levezon ar galleg war distagadur ar brezhoneg er gwenodoù diwezecheg, ha kement-se dre afer ar *liammadurioù*. Ar poent-mañ avad zo bet laketa en ur c'horpus *peder reolenn diazez* hag a sell douzh brezhoneg ar skolioù. Ar c'horpus-se, a soñj an oberour, a vehe gouest da zerc'hel d'ar brezhoneg e garakter dehañ e-hunan, e-lec'h boud ken diarm dirag levezon bouezuz yezh kentañ ogozig an oll deskidi, da lâred eo ar galleg.

Diskoueziñ a ra an diverradenn-mañ daou dres hag a sell douzh afer ar liammadurioù : 1) dindan levezon ar galleg, hag a-vraz, ema sevenadur ar liammadurioù brezhoneg, e kement gwenod diwezecheg a zo. 2) An doare-skriv an heni eo, ouzhpenn-se (evid ar pezh a sell douzh ar c'hensonennoù dibenn-ger), a bouez c'hoazh war mod ar skolidi da seveniñ ar liammadurioù (efed Buben).

Kent displegañ an daou boent-se e rankan lâred ema ar liammadurioù fenomenoù a zegouezh e juntadur daou c'her, fasibl evel ar c'hemmadurioù. Moian zo neuze d'en em c'houlenn perag e vehe degemeraduz lâred « e da té » (liammadur direizh) ha dizegemeraduz lâred « e ta dé » (kemmadur direizh), pa denn an diw dro douzh ar lavarenn **e dad eo**. Diw feson souezhuz da weled an traoù, a gomzin c'hoazh pelloc'h diwar o fenn. Kempleg-braz eo ar sistem galleg, mez poueziñ a ra war heni ar brezhoneg diouzh e zaou vod-ober : ar *liammadur* ez-resiz (skwer « peti-tenfant » : er ger *petit* distaget e-hunan ema mud an **-t**) hag ar *chadennadur* (skwer « le bussarrive » : er ger *bus* e vez distaget an **-s** dibenn ataw). Kalz simploc'h ha kalz reoliekoc'h ema ar sistem brezhoneg, mez ne vez ket anavezet gant ar gelennerion nag, evel-just, gant ar skolidi.

I. LEVEZON AR GALLEG WAR SEVENIDIGEZH AR LIAMMADURIOÙ BREZHONEG

Diskoueziñ a ra ar grafiek-mañ stad an traoù e 2007-2008 (enklask e-tal 226 skoliad ag ar CE2 d'ar Lise). Ober a ra an diforc'h etre Diwan (soubidigezh, amañ an diw golonenn a-gleiz) hag an diwezechegzh dre baridigezh (deskadurezh Publik ha Katolik, a zehoù). Splann eo ema damhañval an traoù en daou sistem kelenn :




(War ar grafiek-mañ e tiskouez PB ar patrom brezhoneg ha PG ar patrom galleg).

Gelliñ a raer lâred kement-mañ :

- Daet eo ar galleg dre an nor vraz da aloubiñ tachenn ar brezhoneg : beteg 60% ag ar liammadurioù sevenet gant ar skolidi zo diouzh ar patrom galleg.
- Hañval eo an traoù en oll vodoù da gas an diwezechegzh war-raog (soubidigezh pe paridigezh).
- Chomel a ra bew ar vodell vrezhoneg c'hoazh, beteg 30%, ar pezh nad eo ket re fall c'hoazh, pa soñjer ne vez ket kelennet ar problem-se er skolioù.

2. LEVEZON AN DOARE-SKRIV WAR SEVENIDIGEZH AR LIAMMADURIOÙ (efed Buben)

Dre ma komzomp ag ar liammadurioù, ar poent doare-skriv a zo anw anehoñ amañ eo heni ar c'hensonennoù-dibenn-gerioù. En doare-skriv muiañ implijet bremañ (ar Peurunvan-41, koulz lâred ema ar sistem ofisiel, a-c'houde ma 'h eus bet divizet ur bloaz so lakaad an oll skolaerion ha kelennerion d'ober gantañ er skolioù gant an tri enseller karget ag ar brezhoneg e Akademi Roazon), ema choaz ar c'hensonennoù-dibenn an heni a oa bet graet e 1901 gant oberourion ar *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*. Daoust d'ar choaz-se boud bet graet a volontez vad moarvad, graet e oa bet pa ne ouie ket an den c'hoazh eh eus daou sort lostgerioù e brezhoneg : ar re neutr, ur bern anezhe, hag ar re galetauz, 9 anezhe (**-(h)a**, **-(h)aad**, **-(h)añ**, **-(h)oc'h**, **-(h)ad/- (h)ed**, **-(h)ad + -(h)i**, **-(h)añ/- (h)añ** ha **-(h)é/- (h)o**). Setu e skriver **pesked** diwar **peskedenn**, é voud m'ema **-enn** ur lostger neutr, mez narenn diwar **peskefa**, é voud m'ema **-a** un dibenn a galeta **-d** ar ger **pesked**, a-gaoz d'un **h** kozh. Levezon an **h** an heni eo a c'heller santoud hiziw c'hoazh er bomm brudet **kig-ha-fars**, a vez distaget « kikafars » (doned a ra **-g** ar ger **kig** da voud [k] er liammadur).



Diskoueziñ a ra splann an eil grafik levezon ar mod da skriv war an distagadur, hag amañ, ez-resiz, ar mod da skriv ar c'hensonennoù-dibenn. Daw eo lâred e vez blotaet an oll zibennoù e brezhoneg er juntadurioù, ogozig ataw, dirag ar bogalennoù, mez ive dirag **l**, **m**, **n**, **r** (ar pezh na vez ket anavezet kalz) ha dirag an hantergensonennoù **w** et **y**. Sed aze e ranker distagañ (diouzh ar vodell vrezhoneg evel-just) « Kongléon » ar pezh a vez skrivet **Konk-Leon** (*Le Conquet*), « evidan dud » ar pezh a vez skrivet **evit an dud** pe « plijuzé » ar pezh a skriver **plijus eo**.

War ar grafik-mañ e weler stad ar liammadurioù sevenet dirag ur vogalenn, diwar ar fichenn **A1** hag **A2**. War **A1** e oa bet skrivet an oll zibennoù-gerioù gant kensonennoù dous (heuliad -b, -d, -g, z, -j, -v), pa oant bet skrivet kaled war **A2** (heuliad -p, -t, -k, -s, -ch, -f). É voud m'ema dous ar liammadurioù brezhoneg e c'hellemp soñjal e tahe aesoc'h ar liammadurioù diouzh ar patrom brezhoneg (PB) pa gave ar skolidi kensonennoù-dibenn dous dindan o daoulagad (evel war **A1**) ; e-kontrel, an dibennoù skrivet kaled (evel war **A2**) a oa sañset degas liammadurioù diouzh ar patrom galleg (PG). An dra-se fasibl a zo degouezet er skolioù.

Gouied a raomp, ha pa skrivomp an oll c'herioù brezhoneg da-heul an diveradur (**tad** gant un **-d** dibenn a-gaoz da **tadig**, **tadoù**, etc.), ne vehe ket laket un dibenn dous d'an oll anezhe (mar skrivomp **braz** gant ur **-z** a-gaoz da **brazig**, e vo skrivet **plas** gant un **-s** ataw rag ma lârer **plasenn**). Nawazh e c'hellomp lâred e kavehemp ouzhpenn 85% ag ar gerioù gante un dibenn dous, ar pezh a zo braz mat, hag ar pezh a sikourehe a gement ar mod da zistagañ ar liammadurioù akord gant an efed Buben.

3) KLOZADUR

Daou dra a c'hellomp ober evid talañ douzh ar stad-se, mar soñjomp e rankomp henn ober (rag moian zo ive, evel-just, da leuskel ar galleg d'ober e reuz diharz er brezhoneg komzet !) :

- Da gentañ desachañ evezh ar gelennerion war afer ar liammadurioù, ar pezh na vez ket meneget er skolioù tamm ebed, koulz lâred : e 52% deuz an hentennoù-brezhoneg ha deuz ar yezhadurioù ne vez ket anw ag ar liammadurioù, en heni diwezhañ anezhe zokén, ar *Yezhadur* bet embannet gant TES e 2009 evid ar skolajidi hag ar liseidi. Nawazh e kaver etre 4 ha 9% ag ar pajennoù gouestlet d'ar c'hemmadurioù er levroù-se !
- Ouzhpenn-se, evid klokaad ar labour, rag ober **heb** derc'hel kont ag an efed Buben a yahe eneb da strivoù ar gelennerion en o c'hlasoù, skriv an oll c'herioù brezhoneg diouzh an diveradur gant ur lostger neutr. Na ankouaad ar juntadurioù diabarzh er labour-se (**raglavar** e-lec'h **raklavar**, etc.)

Jean-Claude Le Ruyet, Badenn, 16 a viz Du 2010/2025a.